

# MARO AR MOUS BIHAN

pe

## Klemmou eur vamm baour

---

I

O ma Doue ! pebez glac'har  
 Evidon-me war an douar !  
 Kollet eo ganin ar bugel  
 A oa ma zikour, ma skoazel.

Evit ma zouten em c'hozui  
 E tec'haz yaouank diouz ma zi ;  
 Gand ar mor e oa goneet,  
 Gantan ive eo bet lonket !

Kemeret 'oa evel mousik,  
 Da labourat war eul lestrik ;  
 E vicher zur na oa ket brao :  
 Riskl e vue 'vije atao . . .

Daouste da ze hen a boanie  
 Evid e vam dre garante ;  
 Gant m'am mije evurusted,  
 Na zelle dimeuz poan abed.

Skriva re d'in, gwech hag amzer,  
 Lizerou koant, dous ha tener,  
 Elec'h ma konte e droiou,  
 E blijadur war ar moriou !

E lizerou ken aketuz  
'Lake ma c'halon evuruz ;  
Kontant dalc'hamad 'vijen, dra zur,  
Rag ma mabik oa eur pôtr fur !

II

Kerzet 're an treo evelse,  
An amzer skanv a dremene :  
— P'an euz an den kez levez,  
Na sonj ket en dristidigez ! . . .

'Zonjen ket penoz eun nosvez,  
Dre ma hunvre 'klevjen eur vouez,  
O laret d'in : « Mam ar wellan,  
N'ho zikourin mui er Vro-man ! »

Ouz he c'hlevet oan dihunet,  
Ankeniet braz ha spouronnet :  
— A dra zur, honnez eo e vouez,  
Anveout 'ran anei ken frez . . .

Deuz ar beure pa oan zavet,  
Ma c'halon baour a oa mantret,  
Rag aboue eur pennad amzer,  
N'am oa bet digantan lizer !

III

Prestik goude e gabiten  
A skrivaz d'in-me evelhen :  
— « Ho mab, gwreg vad, a zo beuzet,  
» Deuz beg ar wern eo bet kouezet.

- » Koueza 'reaz ebarz an dour,  
» En eur c'houlen zikour ! zikour !  
» Hep dale 'rajemp hon gwellan  
» Evit gallout zikour 'nean . . .
- » Mes ar mor a oa ken diroll,  
» Hag an avel ken krenv, ken foll,  
» Ma oe dirag hon daoulagad  
» Kollet ar « Mous », ho pugel mad !
- » Pa n'halle stourin deuz ar mor braz,  
» 'Lakaz 'n e gerc'hen zin ar Groaz,  
» 'Laraz ar c'homzou truezuz :  
» O ma mam baour ! . . . pardon Jezuz ! »

IV

P'am oa lennet ar c'helo kri,  
'Oa ma c'halon prest da zempli :  
Ma bugel biken na welin,  
Gand ar glac'har breman 'varvin ! . . .

Ma hallfen c'hoaz ouz troad e ve  
Skuilh daerou ha pedi bemde,  
'Vefen evuruz em glac'har,  
Daoust d'am zrubuilh war an douar . . .

Mes e gorf 'zo 'barz ar be braz,  
Elec'h ma zo kement . . . siouaz !  
Euo vo ruilhet, diruilhet,  
Gand ar c'herrek e vo blonset . . .

N'halla biken en e barouz,  
Diskwiza zioul ha didrouz,

Er vered, disheol an Iliz,  
'Kenver e dud, e genvroiz !

Na glevo mui kleier o sôn  
Truezuz 'vid an Anaon !  
'Glevo nemed mouez ar mor braz,  
O c'houlen tud da lonka c'hoaz !

O ma Doue, true, true  
Dimeuz ma mab, deuz e ine !  
Groet ma vo ganac'h evuruz,  
En ho Paradoz, ma Jezuz !

V

Ha bremau 'vit 'n em frealzi,  
War ribl ar môr 'c'h in da bedi,  
Da bedi gant fizianz ha fe,  
Evit ma mab bemnoz, bemde . . .

Pa glevin ar mor o krozal,  
Hag an avel foll o yudal,  
Me a laro a vouez uhel :  
— Mor braz ! ro d'in 'ta ma bugel !

Zeblantout raio d'in neuze  
Gwelet anean goude ze,  
Klevet e vouezik ken dinam  
O laret c'hoaz : « Ma mam ! ma mam !! »

AR YEODET.